

SKOAZELL KEAV 2017

Gouzout a reomp ne zesker ket ur yezh dre heuliañ kentelioù nemetken, hag e ranker lakaat anezhi da vevañ er-maez eus metoù ar Skol-Veur, pe ar greizenn stummañ. Gouzout a reomp ivez pegent talvoudus eo evit ar gelennerien brezhoneg kenderc'hel ingal da studiañ ar yezh, dre heuliañ devezhioù-studi ha stajoù hiroc'h lec'h ma c'hellont gwellaat o barrezhioù, ober anaoudegezh gant brezhonegerien all, eskemm war o micher, o skiant-prenet, bevañ ur sizhunvezh pe ouzhpenn e brezhoneg penn da benn. Ken gwir all eo evit an holl re a vez o labourat e bed ar skolioù, kasourien, ATSEM...

Evit skoazellañ studierien Master 1 ha 2 ar c'helenn divyezhek en o studioù, ar gelennerien, ar gasourien hag an ATSEMOù, ha kement hini o labourat e metoù ar c'helenn divyezhek eo prest KEAV d'ober dezho un distaol a 110 euro war briz ar sizhunvezh staj heuliet e KEAV war o amzer vak ha war o c'houst.

Neuze :

studierien M1 war ar brezhoneg 220-110=110 €

kelennerien brezhoneg ha Master 2 war ar brezhoneg ha tud all o labourat e metoù ar c'helenn brezhoneg 160€/

Evit ma c'hellfemp heuliañ gwelloc'h ar goulennoù skoazell, e c'houlennomp diganeoc'h leuniañ al lodenn amañ dindan. Da gas da keav@keav.bzh

Anv Anv-bihan

Chomlec'h

Kêr Kod-post

Pellgomz Postel/lekpoz..... @

Anv ha chomlec'h ar skol m'emaoc'h o labourat

Anv ha chomlec'h ar skol-stummañ m'emaoc'h o studiañ

STATUD (Titlet)

Kentañ derez Eil derez

Kelenner ar skolioù Kelenner eil derez Gwazour tiriadel Kasour

Publik Katolik Diwan Un aozadur all

Skoazell arc'hant digant KEAV evit ar prantad-mañ :

Kentañ sizhun (9 – 15 a viz Gouere) Eil sizhun (16 – 22 a viz Gouere)

Sammad : €

Disentez Kuzul-Merañ KEAV : Goulenn degemeret Goulenn nac'het

Deiziad ha sinadur Prezidant KEAV